



CHANSON

AR PEDER VESTREZ.

Var un ton Neve.

D'AR reb a zo bet ganet en eur blaneden galet,
Ollodemarchou guella zo demarchou collet;
Hac'hoas mar deud dre chanch cavet tam plijadur,
Dre eun nombr a zisgraçou ho pêo gant uzur.

Evit prouvi va dessîn, na ranqin get furchal
Archivou ar baros-mâ n'hac ar barosiou all:
Na meus nemet teurlur zel varnon-me va-unan,
Ha demeus ar virione me a rei preuv hep poan.

Un detail sclêr ha sincer demeus ar maleuriou
A zo aruet ganén e calz eus a vroyou,
A zisqo da beb-unan, hac a brouvo certen
Peguen trist eo an etat eus a goall blaneden.

E zàn eta da gommanç an etat truezus
Demeus va çhanch dinatur, va buez maleurus :
Selaouit ta, tud yaouanq, ha ma qeret dioüal,
Marteze c'houi brofito a valeuriou re all.

Dioüallit eus an amour, ennes ar penn qenta
Demeus an oll disgraçou a meus bet er bed-mâ ;
Poan memes ra dia sonjal en anqen diremet
A meus bet var an douar o veza re garet.

Peder Vestrez a meus bet : unan en Ameriq,
Ha diou ebars en Europ, hac un all en Afriq ;
Ar guenta voa hanvet Catou, an eil Genovefa,
An deirvet voa Pelaji, ar bedervet Anna.

Ne voan nemet pemzec vloas pa gommancis
qenta.

Mont da velet Cataouic hæ d'e zarempreda ;
Ma carien, e voan caret, a guementse voan sur,
Nonobstant d'hon amitie, n'hor boa tam plijadur

Ma aboster am dalc'he, dre ma voan re
youanq ;

N'ellan na comz, na qerzel, nonobstant d'am oll
c'hoant ;

N'eur memes stat e veve an objet a garien,
Hon huanadou a rê hon oll antretien.

Nao pe zec mise voan bed en hevelep poaniou,

Ha c'hoas e vijen chomet, daoust d'am zour-
manchou,

Peneverde ma animas qerent va mestrez qer,
Hac a zifennas outi caouet comerç gant gloer.

Nonobstant d'o difennou, ni n'eur gave bepret
En eur plaç hor boa choazet evit en em velet;
Mes qer e voe d'ar plac'h-mâ cavet fidelite,
Dre ma vije maltretet er guêr pa errue.

Bonjour a joa, va mestrez, hirie penos a ret?
Petra oc'h eus a neve? meurbet oc'h contristet!
Possubl e ve ho qerent a ve qen dinatur
Da exerç en hoc'h enep o maliç dreist musur.

Ia sur, va zervicher, me a eprouvas d'ech
Ar valiçdemeus va zad, an nerzdemeus e vrec'h,
Hoguen evit qementse ne roàn caz ebet,
Pa meus gallet sortial, e zon deut d'ho quelet.

Hoc'h amitie zo fidel, me zo charmet dreizi,
Me vije em plijadur ma vijemp hep anvi;
Mes qeit ha ma valein var have Landreguer,
N'hor bezo evit partach nemet poan ha mizer.

Hi, p'am c'hlêvas, a laras evit va c'honsoli:
Remuomp ar resortchou demeus hon industri;
Marteze dre hon adres ni a deuyo a ben
Da appesi o c'holer ha d'o distrei a grenn.

Hi a eure be fossubl, me eure va hini ;
Nonobstant d'hon effortjou, ze'gresqe hon anvi:
Neuze e velis certain ne voa demp nep moyen
Da souten argroas pouner pini'r boa da zouguen.

Neuze-ta e ris ive va effort diveza,
Ha ma sonjis e voa ret en em dispartia ;
Hoguen, qent evit quittat e zis da velet Catou,
Da gonta dei va doare ebars en bêt gomzou.

Na hortois nep respont a c'hinou va mestrez,
Me a guitas anezi leun a dristidiguez ;
An deiz varlec'h e ris hent evit mont da Baris,
Elec'h ma chomis vardro eur seiz pe un eiz mis.

Ne voa netra er guær-ze, daoust d'e oll fompou,
A guement a zisippe en nep guis va c'hanvou ;
Ar zouch afflijant demeus ar pez am boa collet
Na bermete d'am speret cavet tam joaüstet.

Me receve lizeriou eus ar re douchanta,
Hac a rê d'am c'houliou a neve dioada ;
Erfin qement a receven demeus a nec'hamant,
Ma sonjis mont d'eur plaç all da glasq soulajamant.

An effet a heuill va sonch, ma quittais va studi,
Ha me monet d'ar Rochel vit en em ambarqi,
Ha me mont d'ar C'holoni, d'a zouar Canada,
Elec'h ma ris ar rancontr eus a Genovefa.

Honnes voa ar charmanta demeus an oll
merc'het

Agument am boabiscoas var ar bed-mànguelet;
C'hoas e remerqen enni modesti ha prudanç,
Un antretien charmant ha calz eus a chevanç.

Evit petra benaqet, nàn don qet hep doueti
Ne zeuz den var an douar a guement zo hep si;
Mes ne allàn qet credi e vije em mestrez
Nemet perfectionou ha pep seurt madeles.

Mes allas, dallidiguez eus ar speret humen!
Me na velen qet cuzet dindan ar roz ar spern;
Me na ellen qet güelet dindan croc'hen an noan,
An natur hac ar valiç demeus an ærouan.

Me a voe pell amaret gant al laçou trompus
Sculmet gant dorn miliguët an draitourez
Venus.

Me voe pell er servitud; an amzer gouscoude
A uzas va chadennou, m'am boe va liberte.

Sortiet a esclavach, torret va chadennou,
Va oll occupation voa cassat va joayou;
Mes eus en em re fiout, eur pech all am sias,
A voa crén e ressortjou : ennes c'hoas am dallas.

Na recevis nep gouli na raje din anqen,
Ha mar boan dalc'het captif, va etat a garien;

Dindan ampir Pelaji , rouanes va c'halon ,
Me receve eur joa vras ha satisfaction.

Qement am anaveze a lavare heb mar :
Ema eo chansussa den a zo var ad douar ,
Dre ma plich da Belaji , fleuren an oll merc'het ,
Un exembl a vodesti , gant an oll admiret.

Me va-unan a sonje penos en devoa grêt
Ar rod a fortun un dro benaqet em andret ;
Mes depordit un nebeut qen coll patientet ,
Hac e clêfet e voamp êt pella m'ellemp monet.

Fixet voe guenemp an deiz evit accomplissa
Ar bromesse bor boa grêt vit en em unissa :
Mes me yas da chasseal un devez d'eur forest,
Elec'h ma erruas ganén un accidant funest.

Me racontras dec sovach , tud ar re euzussa ;
Hac en eur stringjont varnòn en avis va laza ;
Mes Doue oll-buissant , mad en andret an oll ,
Deus o daouarn redoutabl a arrêtas an tol.

Va liberte gouscoude diganén a lamjont ,
Hac en guiz eur c'hriminal da Vro-Zauz em
c'hesjont.

Adieu eta , va mestrez , adieu d'am Pelaji ;
Pa ne varvis , birviqen ne varvàn vit anvî.

Me laqa fin d'am histor en sort occasion ,
A poaniou em speret ha chagrin d'am c'halon ;
Mes c'boas e teu din-me zonch deus va douciq

Anna

A b'ini e comzin deoc'h qent eguet finissa.

Madou, guenet ha famill, humilite, chevanç,
A beb amzer anezo e devoa abondanç ;
Daouest d'am indignite, bremâ ez eus tri bloa
Deus e amitie em boe ar bortion güella.

Ebatal rejomp hon daou ha plijadur hor boe
Epad ur bloa pe ouspen, hervez hor bolonte ;
Mes an drouc chanch ordinal eus va heuill

pas a pas

Daoust d'hor fidelite, allas ! hor separas.

Cetu aze, va breudeur, un darn eus va bue,
Circonstançou a lêzân hep comz eus aneze :
Avoalc'h e meus lavaret evit rei da breuven
Er pezh a meus anoncet e penn va c'hanouen.

Güir eo, simplicitéou eo certen qement-mâ,
Me a glefe cavet mez da zont do recita :
C'hoarzit eta, mar qeret, ne vo qet hep justiq ;
Mes diouälit da goea er memes precipiq.

C'houi dreist peb tra, gloer yaouanq, m'ho
ped da evessât,

Goude c'hoarzin re abret, n'ho pez qeus divezat:
N'ho pezet qet gant merc'het enep seurt mi-
gnoniach

Qeit a ma voc'h o poursu ho studi er scolach.

C'houi a occup ar plaçou a meus bet occupet,
Sujet d'an occasion o deveus va dallet :

Lest ar merc'het a goste, tachit d'en em avanç,
Pedit Doue d'ho sicour, hac o pezo, güel chanç.

Pedit Doue d'ho sicour, hac ho pezo, hep mar,
Boneur ebars er bed-mâ, hac er bed-all ar gloar;
Ha pa vezoc'h o pedi, ma zellet, gant true,
Me a esper cavet e'hoas chanch ha prosperite.

FIN.



E Montroulez e ty LÉDAN, Impr. ru ar Pave.